

Berr (Abalor). An Erge Vihan 1874 – Roazon 1946). Da Dierselin (1912)
Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Kinniget da Dierselin

An Ozah braz, pa gemenne
Trei an douar war ar mene',
E Park-Meur ar Hanaouennou,
Dalhet evidom gand on Tadou.

Eñ da genta, gand an alar,
Prim a drohe an douar tomm,
Eün e vomm, hag ar zoh kromm
A lugerne 'kreiz ar breinar !

Meur a vevel greet dioh e zorn,
'Deus palaret tachenn or bro :
Adal Roazon bet' an Elon
Eo mab dezañ neb a gano !

Pell 'zo ez ee da labourad,
O farda deom or magadur...
'Med eun devez, skuiz gand 'n arad,
En em roas d'e Donkadur.

Neuze e floh, Barz e ano,
'Zavas 'n e spered ar c'hoant-ma' :
« Er mod all, kasom an ero
'Vid ma vo al labour brava ! »

Meur a ervenn a oe stignet,
Houmañ didro ha diveskell,
Honhont krommet e mod Gwened,
Krennet ma oa he diouaskell.

E pep seurt mod Barz a hade,
Pep seurt teilaj a zegase,
Kirri stlejet gand an ohen,
Bet' an talar, bet' ar pengenn.

Ha set' an ozah o tihun...
O weled, e rann e galon,
Hag eñ, raktal, mond gand ar run,
Pell dioh ar Park 'n eun draonienn don.

'N eun draonienn don, war ribl ar mor,
'Leh 'ma e di, sioul ha didrouz,
O kas e voked d'an oabl rouz,
'Vel glahar, pell diouz peb goudor !

War lein an dosenn p'erruas,
'Tal an ti, kent ma tiskennas
Ouz ar *Park Meur*, 'taolas eur zell,
E zaoulagad 'vel diou stivell.

War dreuzou e zor azezet,
Ne vire ket ouz e zaelou
Da ruillal druz war e jodou :
« Setu bremañ ma foan kollet ! »

Ha kement-se pa lavare,
Eur strollad braz a vugale,
En o daouarn bara-gwiniz,
'Veule anezañ heb diskuiz :

« Eñ eo a zeskas ar re all
War gounid 'n ed n'eus netra gwell :
E ano war diweuz Breiz-Izel
Biken n'ehano da nijal ! »